

CHANSON NEVE



VAR SUJET

EUR BROMESE FERVANT HAC EUR SEPARASION

ETRE DAOU DEN IAOUANK

Var don ar *Fauz Promese.*

Prosternet e ma c'halon
N'ho prezaus, Bretonet,
Vit goulen ho c'hattansion
Eur momet en sekret :
Me disklerio en guirion
Eur bromese fervant
Hac eur separasion
Etre daou den iaouank.

Na fell ket dia er poent-man
Dont d'abuzi paper.
Sujet avoalc'h a gavan
Hep asten ar matier.
Eur re-bennag marteze
A gemero an er
Da veprizan na bue,
Dre ma e c'hespliki skler.

N'on ket dign a droing sello
Pa n'am anveet ket,
Rac savantoc'h evidon
A zo bet n'em leuyet
Ebars en laso Venus
Hac he mab Cupiton,
Pere a rent maleuruz,
Sivoas! meur a galon.

Me a zo eun den iaouank
Hac a mez consantet
Karout eur plac'h charmant,
Dign da vean karet;
Vit dirac ma daoulagad
Na mez remerket hini
Da gat eun er ken agreabl,
Herve ma fantazi.

Vel gant Doue inspiret,
Da ouel an Asompion,
Me a zo bet azeet
N'he c'hichen 'n eur pardon,
En parouz Pleudaniel,
Kichen eur goz iliz,
Eur plas devot ha zantel,
Goude fin an ofiz.

Eno var douar ar Vere'hez,
Me mez bet remerket
He skiant hac he furnez
Ha memez he genet.
Me mez groet reflexion
Ha n'em sonjet erfat :
Na m'omp biken separasion,
Vit m'ar be ze d'he grat.

Abofter ma iaouankiz
A neuz ma arretet :
Bet a voan vit n'em diviz,
Ha na mez ket kredet
Parlant dei e nep feson
Demeuz ar garante
A zanten bars em c'halon
'N he c'hever en de-ze.

Naon miz omp bet, en guirion,
Hep en em rancontri :
Delc'het ho c'hattansion,
Iaouankiz, me o supli ;
Aman e ten Cupidon,
Gant eun ardeur nevez,
Da alumni 'n em c'halon
Elemanche ar garante.

Annons a riz d'ar plac'h-ze,
O vont d'eun asamble,
Penoz am boa bolante
Da gat he c'hamitie ;
Hac evit 'n em asuri
Deuz he fidelite,
A mez goulen diganti
Ober din promese.

AR PLAC'H.

« Ma mignon, n'imp zo iaouank
D'ober promeseou,
Gand an disteran tourmant
A chauch hon ideou ;
Ma torfemp hon promese
Hac ober eun le parjur :
Me fell d'in en em bue
Cavet eur guir asur.

AR POTR.

Birviken an amzer fall
Na allo distrujan
Ar garante ken leal
Pehini a dougan ;
Mez me zo en dizfians
Demeuz ho carante,
Roet din an asurans
Vit ar rest hon bue.

AR PLAC'H.

Arsa eta, ma mignon,
Pa omp en plas herie,
Na vo ket dre draizon
A rin d'ec'h promese :

Kemer a refomp vit test
Eun avokat a Dreguer,
Rac hon c'halon zo c'hoas fresk
Da chom hep culateur. •

He dorn en em hini,
Prosternet d'an daoulin,
Dirac sant Ervoan-Elouri,
Mab-henan Kervarzin,
En iliz ar Minihy,
An naontek a viz mae,
A prometjomp dimezi
Hon daou an eil d'eguite.

Secret voa hon promese,
Dirag eur bobl a leiz,
Pere diret en de-ze
A bep coste a Vreiz,
Da velot pen ho avocat,
Dre guir devosion,
A douger var eur brancat
Bars er procession.

O solennite joauz
Evit eur bobl a fe,
Discoaz de ken evuruz
'N em boa cat em bue,
Zantout a ran ma c'halon
Vel benet mesk ar joa ;
Mes ret e cat separasion
Rac an noz a dosta.

AR POTR.

« Arsa, plac'h iaouank fidel,
Poent eo dispartian,
An heol zo arri izel ;
Lekeet din breman
Eun termen da n'em gavet,
Herve ho polante ;
Rac pell a omp separet
An eil deuz eguite.

AR PLAC'H.

De eizvet ar Zacramant,
Bars en ker Landreguer,
Zo eun asamble charmant
Gand ar bobl ar c'hartier :
Mar be ze d'ho polante,
Hon daou n'imp ar io
En Landreguer en de-ze,
Goude ar gouspero.

AR POTR.

Var gement-ze, merc'h iaouank,
Me souet d'ec'h bonsoar,
Gant kals a agreamant
Me a delc'ho memoar :
D'an termen a c'heus ficset
Credet me 'n em gavo ;
Na vefomp biken separet,
Vit ar rest hon deyo. »

Pa arriiz bars er gær,
A meuz bet ispliket,
D'eun tad ha d'eur vamm dener,
Ar bromese moa gret :
O daou a skuljout daero
O c'hanaveout ma chaus.
Mes nôz eo pell a zo,
Repozomp en silans.

Kerkent e vanniz kousket,
Vel n'eur ravisamant,
Hac a meuz bet remerkset
Eur groaz kaer a arc'hant,
Ha varnei eur gurunen
Ornet gant greun perles,
Pozet e creiz eur bleuen
En kichen ma mestres.

Dre spont on bet difunet ;
Mes goelet meuz erfat
Ma mestres bars 'n eun archet
Dirac ma daoulagat.
Bet on pell o vevorin
Var sujet kement-ze ;
Mes rabet eo 'n em droublin
Vit kelou eun unvre.

Tostat a ra d'an termen
Pini m'amp asinet ;
Mes goelet a ran eun den
O touet d'am c'havet :
Roet neuz din eun lizer
A zo bordet en du ;
Petra zo var ar paper,
Ret eo goelet dustu.

Al Lizer.

« Salud dec'h, ma guir vignon,
» C'hoaz eur vech dre speret :
» N'in ket d'an asinasion
» A moa dec'h prometet.
» Skoet on gant ar c'hlevet,
» Me gred vit ar maro ;
» N'omp ket gand Doue choazet
» Vit bean prijio.

» Ma be a deni da glenzan,
» Var ben neubet amzer.
» Vit ar vech divezan,
» Adieu, ma servijer ;
» Pa eo Doue on separ,
» Gras d'imp da gaout chaus,
» Da 'n em velet bats er gloar
» Evit hon recompan. »

AR POTR out-han he-unan.

« O bleuen ken florissant,
M'ar koues d'an douar,
Tout ma oll agreamant
A chancho en glac'har ;
Oll esperans ma deïo,
Plijadur ma bue,
Asambles guenit a goeo
Da repos bars da ye.

Rabet eo disonzoli
Vit goelet al lizer,
An termen a zo arri :
Varc'hoaz en Landreguer,
Me a glev o abeurz mad
Ha guir eo kement-man ;
Ar paper a lest lakat
Sort a guerer varnan. »

Arri bars en Landreguer
D'an termen asinet,
Vel ma sonnaz peder-heur,
Me meuz bet intentet
Eur plac'h iaouank o tremen
Laret d'he c'hamarades :
« Sell aze, mezi, eun den
Zo maro he vestres. »

Pognardet e ma c'halon
Ken a frimiz ma goad ;
Vit clevet he declarasion,
E c'havansiz d'he c'hat :
« Respontet d'in, merc'h iaouank,
M'ar be ho madeles,
Me a c'houlen humblamant
Penoz ra ma mestres.

AR PLAC'H IAOUANK.

Na servij ket, den iaouank,
Rei dec'h anoudegues ;
C'honi a zo bet eun tirant
En andret ho mestres.
Hi divar guele ar maro
A lekeaz he foan
Da skrivan dec'h ar c'helo,
Mes c'heuz ket groet a van.

Me a moa e c'hasistet
Da skrivan al lizer,
Goude moa he fransiset
Ha roet d'ar facteur.
Hi finisaz he bue
D'er goener d'abarde,
Ha herie deuz ar beure
E diskennet 'n he be.

AR POTR.

Me moa kals a esperans
A voa fauz al lizer,
Pe groet gant tud a blezans
Vit tremen ho amzer.
Mes o comzo ken pikant
A boes var ma speret.
Me a lar dec'h, merc'h iaouank,
Kenavo 'r c'hentan goelet. »

Couitat a riz an asamble,
Occupet ma speret ;
Rac me en em vel hiric
Maleuruz voar ar bed.
Ma mestres a zo maro
Ha me a chom breman
Da dipitan ma deïo
Var he lerc'h er bed-man.

N'anvean ket ar matier
A galmse ma glac'har,
Me na mo ken mes malheur
Biken var an douar,
Pa velan pegen iaouank
E c'he deut ar maro
D'am plonji bars en tourmant
Deuz a greiz ma joaio.

Servij ket din chom aman
Da isplikan canvo,
Rac na allan ket kanan
Ha goelan var eun dro.
Suplian a ran Doue,
Maro var ar C'halvar,
Ma recevo he c'hine
Ha n'imp oll en he gloar.

Groet gand PIERRE RÉZON,
Goude bean resevet an declarasion
Digant eun den iaouank dezolet
Gant glac'har d'he vuan caret.

(Propriété de l'Éditeur.)

